

PLAC'H KOANT BREIZ-IZEL

War Ton : *An Durzûnel*

1

Setu me koz a dizantet, ha prestik ma c'halon
N'hello mui, siwaz ! mignônet, kana na gwerz na zon ;
Velkent e loskin c'hoaz, skiltruz araog mervel,
Eur ganaouen karantezuz da verc'het Breiz-Izel.

2

Chom keñt-all heb sevel eur zon, ô Doue pe ger kri !
D'ar re deuz laket a viskoaz ma holl goad da virvi :
Trugare c'houlennan ; rag hirie hon er zell
De n'em Digoll en ho kenver, merc'het koant Breiz-Izel.

3

C'hwï 'peud touellet he speret d'ar barz en pep amzer.
Evidoc'h he zellou lemma, he zonjou gloan ha kaer ;
Ureou alaouret ! a dalek oe bugel,
Ar barz 'so deoc'h korñ hag ine, m'erc'het koant Breiz-Izel.

4

Ho sellou flour, ho c'hoaz skilitin c'ha beteg ar galon,
Ho mouez voan a zao an ene dre an disterra zon :
Gant eur zin ar baotret na c'houlennont ked well,
Met senti ouzoc'h en pep tra, merc'het koant Breiz-Izel ?

5

Gant ho kwiskamanchou ker koant, plen pe marellet kaer,
Ho kwouefou gwen dantelezet, a zougît gant herder ;
Koulz barz er baourente 'vel en eur renk hûel.
Oc'h bepred tentuz ha dispar ! merc'het koant Breiz-Izel.

6

Korfet brao, kerc'hen gallouduz, beg flour gant diou rozen,
Troad distag gant eur bale skany, lagat sklear ha laouen ;
Dre holl hag en pep stum, en tok pe diskabel,
E c'hanvezer dreist ar re all merc'het koant Breiz-Izel,

7

Netra 'vank da verc'het ma Bro, na tu na bravente,
Na nerz na dalc'h, speret, furnez, gant se gwir garante ;
Eur genet burzuduz ? 'lakafe gant eur zell
Yann-e-Gall da ben diê ! Deuz maouez Breiz-Izel.

8

Redet meuz a bep seurt broyou, gred ganen tro ar bed,
Poezel genet ar merc'hejou dré lec'h meuz tremenet,
Ha n'heblêc'h ne weliz, nag a dost nag a bell
Ar seurt d'an hini 'zao dispar gant maouez Breiz-Izel.

9

N'ententan ked dre ar genet eur skeuden koantiri
C'ha brao deuz drem merc'het ar Spagn ha re an Itali,
Deuz lagadou dû kaer ; met a zo dishanvel
Ha disterroc'h en pep stum all deuz plac'h koant Breiz-Izel.

10

Sellit deuz plac'h distum Bro-Zaoz, hir voan, plad penn-
[da-benn,
Deuz ar Normantez teo ha grôz, en giz d'eur vogoden (?)
Ar peur-rest en Bro-c'Hall renk starda ho c'hroazel ;
Ia ! dre holl e m'aint pell war lec'h merc'het koant Breiz-Izel.

11

Ouspen e tougit serz bepred eun tenzor ar c'haera
A zalc'h hom gwenn dud en he zao, ne oar den ped mil vloa !
Baleit sonn ho penn, ganeoc'h 'man ar siel
Deuz starta tud a oe biskoaz ! merc'het koant Breiz-Izel.

12

Te eo rouanez ar merc'het, ne dal ket dislaret,
Dre c'halloud hag en pep doare, plac'hik ma bro garet !
Ma vije bed ar c'hiz kass merc'het d'ar brezel,
Te 'raeche stoup deuz ar re all, maouez koant Breiz-Izel.

13

Met arabad 've ken brezel war gern ar bed paour-man :
Goude ker goaz spont a dismantr, Peoc'h da viken breman
Hom dever, paotr ha plac'h, eo dont de n'em zevel
Vit goulén stard *Peoc'h* ha *frankiz* d'hor bro gaer Breiz-Izel !

14

Rag aman 'raer c'hoaz brezel zod d'ar yez kaer brêzonek.
Met war ze ni n'eump eun barz krenn, pa vefomp kalonek
Da c'houlén assamblez, dre holl a vouez huel
Diski nezan d'hor bugale en skoliou Breiz-Izel ?

15

En deiz ma vemp holl unanet da zifen hom gwiriou,
Pobl all ebed n'eo ar gallout da gerz war hom zeuillou ?
Pa na laesfomp netra da vont gant an avel,
Ar vûe 'vo demp kaeroc'h c'hoaz, merc'het koant Breiz-Izel.

16

Da c'hortoz, kendelc'hit 'ganeomp, d'ober ho teveriou,
Ha ni 'vo brudet ha meulet a dreuz an amzeriou,
Vel eur Wen-Dud dispar, nerzuz ha divarvel !
Pebeuz enor droc'h da viken, merc'hejou Breiz-Izel !

Ch. ROLLAND

Kan bale Gourenërien Breiz

Gant CH. ROLLAND

Redet meuz a bep seurt broyou, gred ganen tro ar bed,
Poezet genet ar merc'hejou dré léc'h meuz tremenet,
Ha n'hebléc'h ne weliz, nag a dost nag a bell
Ar seurt d'an hini 'zao dispar gant maouez Breiz-Izel.

Da c'hortoz, kendelc'hit ganeomp, d'ober ho teveriou,
Ha ni 'vo brudet ha meulet a dreuz an amzeriou,
Vel eur Wen-Dud dispar, nerzuz ha divarvel !
Pebeuz enor droc'h da viken, merc'hejou Breiz-Izel !

Ch. ROLLAND

Kan bale Gourenërien Breiz

Gant CH. ROLLAND

An eil priz en Konkour ar Falsab

War ton : « *Sao Breiz-Izel* »,
deud deuz Bro-Saoz gant Taldir

Tro al Linz : *Eur vouez hepken a gan pep kouplet ; an Diston, holl a bez*

1

War zao ! naotret Breiz ? kalon, nerz hag imor !
Ar gourenou braz 'so digor,
En daou dû d'ar mor, aman 'vel en Breiz-Meur,
Léc'h oa gwechal chomet breudeur
Da rei eveltomp testeni d'an holl
Na yêlo biken goad Breiziz da goll !

Diston :

Chachomp-ta bepred, goasoc'h 'vit biskoaz ?
Diskwellomp d'ar Bed n'omp ket maro c'hoaz !

2

Barz en pep amzer giz koz ar gourenou
Neuz c'heuillet braster ar boblou ;
Grêket, Romanet, 'rae gantan goueliou kaer
En enor d'an Tad Jupiter :
Tri mil bloa goude 'm'an ganeomp er penn
Dreist ar broyou all 'vit enor hom *Gwenn* !

(D'an diston)

3

Mibien gallouduz d'eur bobl kalet ha krenv,
Ar starta 'oe dindan an env,
Ni 'vo da viken gourenërien dispar,
Prest da rei penn d'an n'heb a gar ?
Neuz forz a beléc'h, dizroug ha divlam,
Beteg gwelet piou 'neo ar c'henta lamm ?

(D'an diston)

4

Kerzomp-ta gant lorc'h ! pa man warnomp ar zell ?
Da bardonniou kaer Breiz Izel,
A zalc'ho ganeomp dont war gaerad bep tro ;
Ni 'lak an traou da vont en dro ?
O tigas d'hom c'heul berniou zellërien
Da c'houd piou 'vo Goaz, trec'h war an dachen ?

(D'an Diston)

5

Beteg dreist ar môr ni yêlo kalonec,
A beb-eil bloaz gant Cottonnec,
Neuz gret da bep tra mont prim war an tu mad ;
Laket Breiziz de n'em dostad,
Ha kresket ho nerz da Vro-Saoz ha Franz,
O rei d'am « *Emglëo* » ha d'ar *Peoc'h* al lanz !

Diston :

Chachomp-ta bepred, gwasoc'h 'vit biskoaz ?
Diskwellomp d'ar Bed n'emp ket maro c'hoaz !

(Chom ? Halte ? Ar c'haner krenv :)

Ha kanomp enor d'hom Gourenërien,
Gloar ha meuleudi, dê da virviken !

PAOTR BREIZ EN HE BAOURENTE

D'am faeron Drouiz
Doktor Ch. Cottonneq

927 Tirage non signalé dans Ollivier

(War he c'hed)
(Ton Kastel-Paol)

1

En eul lann vraz war lein ar mene,
En gwarez an ivin, ar fô,
Dirag an avel hag an arne,
En kornic eul lochen kolo
Ya eno, tud kaez, 'n eur gwele kalet
E tritaz ma c'halon o tond war ar bed !
Ya, eno hon bet ganet,
Luskellet ha maget.

2

Eno 'meuz sonj-mad pa oan bugel
Meuz bed aliez tom ha yen,
Gwisket fall, dierc'hen, diskabel
Renken mont en dro 'vel pep den ;
Mâ, neuz forz, tud kaez, en kreiz ma zruillou
Ma c'halon a lampe reddec ar parkou
Ya, eno me n'em blijje
En kreiz ma faourente.

3

Eno dre ma saven war an oad
Me vije kaset da vaesa
Eur veuc'hic-laez, eur c'haor, pemp danvad,
Oa d'am zud an holl pëadra ;
Mâ, eno, tud kaez, pell deuz trouz ar bed
Me veve dibreder ha dinec'h meurbed,
Evrusoc'h en gwirione
Evit meur a Roue !

4

Eno 'lêc'h na zao seurt en erven
Met kanab, segal hag ed-dû
Lêc'h na ve bleun nemet er spern-gwen,
El lann, er balan, er bruk ru ;
Mâ, eno, tud kaez, en ho c'hreiz bemde
Da c'heul an holl eonet, seder evelte ;
Zard ha yê korff hag ene
Gant bleun koant ar mene !

5

Eno tro pad reuz ar gwendili
Lêc'h na ve frouezen en deillo
Nemet avalo pud hag ili,
Mouar en drez, kivij er fô,
Mâ neuz forz, tud kaez, 'vel kanlartet all
D'o dispen, d'o dêbri me a m'ije mall ;
Ma c'halon baour a vervu !
O testum, aneze !

6

Eno lêc'h na weler o tremen
Met kar an ankou, groac'hel koz,
Pëoyen gaez, eur bern pillauriën,
Ar marc'h glaouer, ar foll en broz ;
Mâ, vit-se, tud kaez, me domme ma goad
Deuz kement a gerze a biou ti ma zad ;
A greiz kalon me garie
Tud kaez ar baourente.

7

Eno lêc'h an holl drouz a glêver
Eo kloc'h braz ar baroz en brall,
Garm ar c'horn-boud, mouez voan ar maeser
Ar biniou o son da zansal
Mâ, neuz forz, tud kaez, demeuz eur seurt son
Me chome da zilaou a greiz ma c'halon ;
N 'oa ket evidon, kamet,
Muzic muioc'h karef.

8

Eno, kreiz ar gouan aliez
E meuz bet poaniou diviner,
Nec'hamant, riou, naon ha dienez,
Glac'har hag anken leiz ma lër ;
Mâ neuz forz, tud kaez, pad ar gouan kri
Me zante ma c'halon meur wech o virvi,
En despet d'am faourente,
Dre nerz ar grazante !

9

Met eno en kreiz ma farouente
Me n'em digolle aliez,
Oc'h eva gwin, jistr ha chufere
Deuz taol gant ma amezêgez ;
Gant tud vad ma bro dremene netra
Ma ne vijen pedet unan ar c'henta,
Beteg da c'hoari karto
Noz ar goadegenno.

10

Eno, lêc'h 'tireda a bep tu
Bep sul kalz a gent seurtet vad
Da c'hoari kornjeel ne dotu :

11

Eno 'meuz rôet tro aliez
D'ar vâr, d'ar falz ha d'ar freillou,
D'ar berchen, d'ar men-poez, d'ar c'hravez,
Da veur a grog er gourenou,
Ha bep gwech, tud kaez, tûaed da rei bec'h,
War meur a chachaden, fei me 'vije trec'h,
Ha d'ar gear pa zistrôen
Pebeuz stad em lochen !

12

Eno, nag a ziduamanchou ;
Mont da nozvecha goude koan ;
Kana da laket c'hoarz avichou ;
Konta marvailloù 'tal an tan ;
O klêvet, tud kaez, konta taoliou-kaer,
Ma speret aketuz 'vije ken zeder !
Gredan ket 've tunveet
Kalz brasoc'h êvrustet ?

13

Eno gant ma dousic Marivon,
Koanta maouez 'oe en taol-bro,
E meuz bed redet meur a bardon,
Ha gret ganti meur a zan-tro ;
Ma c'halon, tud kaez, em c'hreiz a dride
Ma dorn krog en hini ma wir garante :
Pebeuz lorc'h en he c'hever
O font de c'hass d'ar gear.

14

Eno c'hoaz nag a blijaduriou
Mije ked en noz kenta 'Vae,
Noz an Nedelec, 'taol ar foariou,
Ha pad tri devez Malarje ;
Kredabl deoc'h, tud kaez, gant goueliou ma bro,
O roula yaouankiz me c'hae serz en dro,
Da zansal ha da gana
Vijen deuz ar c'henta !

15

Eno c'hoaz en dro d'an tantajou,
En nozvezioù souben al laez,
Meuz bet kanet rimoustadennou,
Laket c'hoarz ha gwel aliez ;
Ya, 'vit, gwir tud kaez, aboe m'hon er bed
Deuz meur a geusteren tanveet meuz bed
Ha zouben ar garante
Eo ar wella neze !

16

Redet meuz bed a bep seurt broyou,
Klevet, gwelet kalz a draou kaer ;
Bed hon en toez prinset ar c'hearjou,
Zantet ar bed-man 'n he braster !
Ha neblec'h, tud kaez, n'hon bed n'em dommet
Vel deuz al lanneyer lec'h hon bet savet
Eno barz em faourente
En bro ar garante.

17

Me c'houlen êchûi ma deyou,
Pa na vin ken mad da netra,
Eno pell-pell deuz trouz ar c'haerjou,
Brasoniou ar bed paour-man,
Eno c'hoaz, tud kaez, lêc'h e ren bepred
Gant gijou hom zadou ar ar gwir êvrustet,
Ar peoc'h hag ar garante
En bro ar baourente !

18

Chomet paour gant greg ha bugale,
Hirie c'hoaz, gwelit mignonet
E plij din konta deoc'h ma doare,
Komz deuz an amzer dremenet
Ar c'haera deomp holl, gret en honestiz
Rag daoust ma na deujo biken war he giz
E ro nerz d'ar gwir vûe
Beteg er baourente.

19

Dre ze, me deu hirie d'o pedi
Da garout evelton ho Pro ?
Ha da gana dezan meuleudi
Braz ha bihan, en Breiz tro-zo
Ha dre holl, tud kaez, c'hwil p'o zur ive
O kwalc'h a blijadur tro-pad ho pûe,
Memeuz barz er baourente
Harpet gant karante !

20

Breman, tud kaez 'vel ma vin galvet
Da vont lec'h aed hom zud koz,
Gant alvez...

Met eno en kreiz ma farouente
 Me n'em digolle aliez,
 Oc'h eva gwin, jistr ha chufere
 Deuz taol gant ma amezēgez ;
 Gant tud vad ma bro 'dremene netra
 Ma ne vijen pedet unan ar c'henta,
 Beteg da c'hoari karto
 Noz ar goadegenno.

Eno, lēc'h 'tireda a bep tu
 Bep sul kalz a gent seurtet vad
 Da c'hoari kornigel pe dotu ;
 Doue ! pebeuz lorc'h, brasa stad !
 Eno 'vat, tud kaez, meuz gret meur a reuz,
 Pilet bill ha killou, ruillet boulou beuz ;
 Tremenet kalz a amzer
 Vel en eun uvre kaer !

Dre ze, me deu hirie d'o pedi
 Da garout evelton ho Pro ?
 Ha da gana dezan meuleudi
 Braz ha bihan, en Breiz tro-zo
 Ha dre holl, tud kaez, c'hwi p'o zur ive
 O kwalc'h a blijadur tro-pad ho pûe,
 Memeuz barz er baourente
 Harpet gant karante !

Breman, tud kaez 'vel ma vin galvet
 Da vont lec'h aed hom zud koz,
 Grit n'hann-doue ma vin doaret
 En beret vihan ar baroz ?
 Eno c'hoaz el lec'h 'drito ma c'halon
 O klevet ar c'hleyer, ar biniou o son,
 Hag an holl moueziou karet
 Deuz ma bro biniget !